

# PARROZ. KEMPER

D'ANN

## ITRÔN VARIA GELLO-MAD

DISKAN:

*Rouanez ar Zent, ann Ele,  
O Itrôn Varia Gello-Mad,  
Klevet peden ho pugale  
E peb amzer hag é peb stâd.*

1.

Evel enn amzer hon zud kôz  
Ho d'euz bet kement ho karet,  
Renet, renet war hon farroz,  
Bezeta hon Itrôn Vad bepred !

2.

Enn Env, d'euz ho Trôn alaouret,  
'Kichen ho Mab hag hon Zalver  
Koz ha iaouank hon zikouret,  
Holl omp d'ac'h en parroz Kemper !

3 .

Hon mam, adalek hon c'havel  
E d'euz gant joa d'ac'h hon gwestlet  
Hag hoc'h Hanô dous evel mél  
Gant-hi ive hon euz disket !

4 .

En dez kaër deuz hon fask kentan  
Daoulinet dirag hoc'h Aôter  
Hon euz n'em roet hon unân  
D'ac'h da vikenn, O Mam dener !

5 .

Pa-z-omp eta ho pugale,  
Hon chilaouet, Mam dous ha mad,  
Leün a fianz n'ho karante  
E kinnigomp d'ac'h hon mennad !

6 .

Pellêt euz hon brô peb gwalen,  
Krênvêt joa ann ine fidel,  
Plénêt distrô ar bec'herien,  
Dousêt daëro kement a wél !

7.

Gwellêt he glénvet d'ar c'hlanvour,  
Sklerêt spered an dén dallet  
Berrêt he boan d'ar micherour,  
Skanvèt he groaz d'ar paour ho ped !

8.

Hon zud a vôr, en noz ténval,  
Ho bag kaset gant gwall amzer,  
Ho kalv, ho ped.... deut d'ho diwall  
Ha renet-hè digoll d'ar ger !

9.

Hon zud iaouank 'zo mez ho brô  
War an douar ha war ar môr,  
C'houi zo ho Mam, hag ho dalc'ho  
En hent ar Feiz hag ann enor !

10.

Roet kalon ol al labourer,  
Hen miret euz ar gwall-gollo,  
Binniget hâd he barkeier ;  
Joaûz gant he dud ho meulo.

11.

D'an dud iaouank roet furnez,  
Ma c'hômînt stard n'ho karante ;  
D'ar vugale zentidigez,  
D'imp holl delc'h mad doujans Doue !

12.

'Hed hon buez ni ho karo,  
O Itrôn Varia Gello-Mad !  
Deût gant Jezus war hon maro  
Da zerri d'imp hon daoulagad !

13.

Neuze, e palez ann Envo  
Enn ho kichen, O Mam Zantel,  
Ni gâno ho madelezo  
'Kreiz ar joaüsted eternal !!!

Y.-M. S.

Brioci, die 12 Octobris 1895.

*Imprimatur.*

A. CHATTON, V. G.

---

Landreger, e ty AR FL' M, Mouler.